

## Providans Doue.

### AR GLAO HAG AR MARC'HADOUR

Var don : *Petra zo nevez e ker Iz?*

1.  
Nevez-zo, divar benn ar glao  
Em euz lennet eun histor vrao,  
Eun histor hag a raio vad  
D'ar re'glemm ouz Doue dalc'hmad.

2.  
Eun deiz benak, eur marc'hadour,  
Ganthan eleiz a beziou aour,  
A ioa eun tammik divezad  
O tont d'ar gær dioc'h ar marc'had.

3.  
Setu deuet eur barrad-glao ;  
(Beza dindan ne ioa ket 'brao ;)  
Dillad ar paour kez marc'hadour  
Dizale zo eat gleb-dour.

4.  
Evel ma tigouez an amzer  
Eo mad d'an den he digemer ;  
Mes hor beachour er c'hountrol  
A enep Doue a c'hrosmol.

5.  
« Ma vijen Doue, emezhan,  
« Ne rafen ket glao breman ;  
« Pec'hed eo beza didruez  
« Ouz an dud keiz a zo er mæz. »

6.  
Epad ma kendalc'h evel-se  
Da damall an Aotrou Doue,  
'N'eur lavaret eo didruez,  
E kichen eur c'hoat e tigouez.

7.  
Ema o vont dizoursi kaer,  
Pa zilamm ac'hano eul laer,  
Eul laer gant eur fuzil karget,  
Ha prest da ober eun torfed.

8.  
Pa vel eo bizet gant an tenn,  
Ar marc'hadour a stou he benn.  
Ar paour kez den a gav dezhan  
Ema, ziouaz ! achu ganthan...

9.  
N'eo ket... Doue 'n'he vadelez  
A astenn dezhan he vuez...  
Ar poultr zo glebiet eun tammik,  
Hag ar fuzil ne lavar grik...

10.  
Ar beachour e savete  
A lar dioc'htu : « Bennoz Doue !  
« Bennoz d'ar glao a zo kouezet...  
« Anez ar glao e oan lazet... »

11.  
Antronoz vintin, pa zavas,  
D'he vugale e lavaras :  
« Meulit Doue, bugale ger,  
« Dre ma ioa deac'h fall an amzer. »

12.  
Hag hen neuze kounta dezho  
E ioa bet tostik d'ar maro.  
« Panefed ar glao, emezhan,  
« E kanv d'ho tad vijac'h breman. »

13.  
Nag a dud, siouaz ! a glever,  
Pa vez divalo an amzer,  
O c'hrosmolat enep Doue !  
Na diskiant eo an dud-se !

14.  
Lezomp Doue da ren ar bed  
Hervez he volentez bepred ;  
Rak ni hor spered zo gwall verr  
Da ziski dezhan he vicher !

15.  
N'euz forz pe seurt amzer a ve  
Eur guir gristen a veul Doue ;  
Dezhan e lavar : « O va Zad,  
« C'houi glask bepred va brassa mad.

16.  
« Dre ar zec'hor, an doureier,  
« Dre ar ienijen, an domder,  
« Gant an holl dud ra vo ato  
« Meulet, benniget hoc'h nano ! »

A. M. D. G.

*Le Gérant* : BOZEC.